

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

59. (PA OAN ME EM GWELE DALC'HET)

pa oen me em gwele dalc'het traitralala
dalc'het gant eur barr kleved

pa oen deut iac'h klok° adarre ° En destenn skrivet
ha me mont d'ober eur bale dindan gant ar c'hreion
e lenner : pa oen
ha me o vont da Landreger iac'h parfet adarre
ha me kaout va mestrezik ker

ha me oc'h ober ma c'hompliment
vel man ar c'hiz d'an dud iaouank

hag hi oc'h ober eun huanad
sellet em c'he° ken agreabl ° em c'he, distaget
em c'hê, a dalv: war
ha me o vont c'houlen outhi du ennon. Da gê = e-
ma dousik koant euteur dimei trezek.

eoitonn da vezan iaouank
/respountiz/° dezhan insolant ° a-us: lavariz

ne ket diouar ar c'hoazentchou
e vez great an dimeiou

nag ve a goste eun tu bennag
leac'h ma ve ganimp 'r belek

leac'h ma ve eur belek pe daou
hag eunn nebeudik a destaou

beo eo ma mam beo eo ma zad
ho c'henje ho daou a ve rekado° ° Kompren : ret kaout

ha me o vont c'houlen outhi
merc'hik koant deut d'an ostaleri

ha pa camp euz taol azeet
gant get enor ha peb resped

ma dousik koant din ha leret
pe c'houl am c'har pe c'houl na ret

pe c'houi am c'har eouit serouicher
pe eouit tremen an amzer

ia emehi ho karout a ran
evel ar galon a dougan

nemet c'houi, 'mei n'em c'heret ket
n'oc'h met iuzaz° em andret (1)

n'oc'h met eur iuzaz° em andret
na deut ganen d'am c'habineḡ

ma ian ganec'h d'ho kabinet
e toufet d'in ma eureuchfet

ne douan ket al loar zo skler
abred oc'h da vont d'ar ger

m'oz pe trubuilh digant ho tud
respontet d'he heb ober brud

ha bet sonj mad en ho kalon
deuz a gomzou ho kwir vignon

vvvvvvvv

(1) An destenn skrivet dindan gant ar c'hreion a la-
var : n'oc'h ken met eun treitour em andret; evel el
linenn war lerc'h en devoa Milin notet gant ar
c'hreion : eun treitour .